



# LISEIDI DIWAN, O FAMILHOÙ HAG AR BREZHONEG

**Enklask kaset da benn etre miz Du 2019 ha miz Genver 2020**

**314 lisead Diwan**

**Rentañ-kont hir**

Kenurzhiañ an enklask : Katell Chantreau (doktoradez Skol-veur Roazhon 2, CREAD)  
ha Gildas Grimault (kelenner Skiantoù ekonomikel ha sokial e Lise Diwan Karaez)  
Alioù : Stefan Moal (CRBC / Roazhon 2), Hugues Pentecouteau (CREAD / Roazhon 2), Catherine Bouroulleg (Ofis Publik ar Brezhoneg)  
Skoazell : Lise Diwan Karaez  
Sevel ar rentañ-kont : Katell Chantreau ha Gildas Grimault  
Maketenniñ : Catherine Bouroulleg, Katell Chantreau, Fabrice Véronneau

# TAOLENN

## 1. Kondisionoù an enklask

- 1.1. Ur raktres daou berzh ennañ
  - 1.1.1. Ur perzh pedagogel
  - 1.1.2. Ur perzh skiantel
- 1.2. Sevel ar c'houlennaoueg
- 1.3. Dastum hag enrollañ ar respontoù
- 1.4. Kodiñ ar roadennoù
  - 1.4.1. Sevel rummadoù
  - 1.4.2. Sevel feuriaderioù
- 1.5. Doare kinnig ar respontoù

## 2. An disoc'hoù simpl

- 2.1. Al liseidi
  - 2.1.1. Piv eo al liseidi ?
  - 2.1.2. Al liseidi hag ar brezhoneg
- 2.2. Mammoù ha tadoù al liseidi
  - 2.2.1. Piv int ?
  - 2.2.2. Barregezh war ar brezhoneg
  - 2.2.3. Santimant ouzh ar brezhoneg
  - 2.2.4. Treuzkas ar brezhoneg dre ar skol
  - 2.2.5. Treuzkas ar brezhoneg er familhoù
- 2.3. Neuz yezhel familhoù al liseidi
  - 2.3.1. Barregezh ar gerent war ar brezhoneg
  - 2.3.2. Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg
  - 2.3.3. Treuzkas brezhoneg

## 3. An disoc'hoù kroaziet

- 3.1. Levezon an elfennoù demografek
  - 3.1.1. Al live klas
  - 3.1.2. Ar jener
- 3.2. Levezon an hentad skoliata
  - 3.2.1. Ar skoliata er c'hentañ derez
  - 3.2.2. Ar skolaj orin
- 3.3. Levezon neuz yezhel ar familh
  - 3.3.1 Barregezh yezh ar gerent ha treuzkas er familh
  - 3.3.2 Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg

## 4. Profil brezhonek al liseidi : un dipologiezh

- 4.1. Profil brezhonek al liseidi
- 4.2. Liamm etre profil brezhonek al liseidi ha neuz yezhel o familh

## 5. Stagell

Goulennaoueg

# 1. KONDISIONOÙ AN ENKLASK

## 1.1. Ur raktres daou berzh ennañ

E miz Mae 2019 e oa bet pedet Katell Chantreau da ginnig hec'h enklask war treuzkas brezhoneg er familhoù dirak tri c'hlasad eus lise Diwan Karaez. D'ar mare-se e oa kroget eskemmoù etre Katell Chantreau ha Gildas Grimault, kelenner Skiantoù ekonomikel ha sokial el lise, war ar mod da zoonat ar preder-se gant al liseidi. Diwar-se e oa bet ijinet ur raktres daou berzh bras ennañ : ur perzh pedagogel hag ur perzh skiantel.

### 1.1.1. Ur perzh pedagogel

Etre miz Du 2019 ha miz Genver 2020, da-geñver kentelioù Skiantoù ekonomikel ha sokial, e oa bet kinniget d'ur c'hlasad eilvet eus lise Diwan Karaez (Eilvet Du) sikour sevel ha kas da benn un enklask el lise diwar-benn al liseidi, o familhoù hag ar brezhoneg. Meur a bal a oa bet lakaet d'an dra-se evit al liseidi :

- dizoleiñ metodologiezh un enklask sokiologel produiñ sifroù,
- kompren penaos e vez levezonet sokializadur ar re yaouank gant ar familh ha gant ar skol,
- prederiañ, hep barnañ, war implij ar brezhoneg gant al liseidi.

Plijus o deus kavet al liseidi sevel ur c'houlennaoueg. Dedennet int bet gant an disoc'hoù kentañ hon eus gellet kinnig dezho, dreist-holl ar re tost outo : levezon ar jener, levezon ar skolaj orin pe al live klas. Klasket o deus displegañ an disoc'hoù.

### 1.1.2. Ur perzh skiantel

Ouzhpenn ar perzh pedagogel evit al liseidi e oa ur perzh skiantel a-dreñv d'ar raktres-se. Tri fal bras a oa bet lakaet :

- kompren gwelloc'h endro yezhel al liseidi,
- produiñ sifroù evit magañ un enklask war treuzkas ar brezhoneg er familhoù kaset gant Katell Chantreau da-geñver un dezenn e Skiantoù an Deskadurezh, renet gant Hugues Pentecouteau ha Stefan Moal, hag arc'hantaet gant Skol-veur Roazhon 2 ha Rannvro Breizh,
- sevel un ostilh padus evit studiañ emdroadur an treuzkas brezhoneg er familhoù er bloavezhioù o tont, gant ar soñj adober an enklask-se el liseoù Diwan, bep tri bloaz, pa vez nevesaet penn-da-benn ur rummad liseidi. An OPAB a gemero e karg an enklask-se en dazont (dalc'h kentañ e 2022-2023).

## 1.2. Sevel ar c'houlennaoueg

An dachenn studi a oa sklaer ha bevennet mat : lise Diwan Karaez, 315 lisead ennañ.

Kensavet e oa bet ar c'houlennaoueg gant ar c'hlasad eilvet ha Katell Chantreau. Da gentañ e oa bet savet asambles roll an titouroù hollek a felle deomp dastum (reizh, klas, lec'h bevañ...). Goude-se e oa bet savet daou strollad : unan o labourat war ar brezhoneg er familh hag egile war liamm al liseidi gant ar brezhoneg. Temoù resis a oa bet roet da bep strollad (da skouer : live brezhoneg al liseidi, implij ar brezhoneg gant ar vignoned, gant an dud-kozh, perzh er stourm...), dezho da stummañ goulennoù serr ha respontoù.

Dastumet e oa bet an holl ginnigoù ha savet ur sintezenn diwarne. Kaset e oa bet ar sintezenn-se d'an OPAB evit kaout o ali, ha graet un nebeud cheñchamantoù diwar o evezhiadennoù. Pleustret e oa bet ar c'houlennaoueg er c'hlasad, gant 20 eilvead. Kemmet ha resisaet e oa bet un nebeud goulennoù diwar evezhiadennoù ha diaesterioù bet gant al liseidi-arnod. Prest e oa neuze ar c'houlennaoueg da vezañ skignet.

## 1.3. Dastum hag enrollañ ar respontoù

An eilveidi du zo tremenet a glasad da glasad da ginnig ar raktres d'an holl liseidi. Displeget o deus goulenn-mañ-goulenn pa oa ezhomm. Pep lisead en deus respontet d'ar c'houlennaoueg e-unan, war baper. Ur c'helenner a veze ganto atav. Un 50 goulennaoueg bennak zo bet dastumet ouzhpenn gant Katell ha Gildas : re liseidi ezvezant devezh an dastumadeg ha re liseidi o deus ranket adleuniañ ar c'houlennaoueg un eil gwech peogwir e oa bet kollet ur pakad goulennaouegoù bet kaset dre ar post. Lod anezho o deus respontet d'ar goulennoù war-eeun en linenn.

### **315 lisead a oa skoliataet el lise e 2019-2020, 314 anezho o doa respontet d'ar c'houlennaoueg.**

E-korf div gentel SES eo bet ebarzhet ar respontoù en un diaz niverel (furmskrid SPIP). Ar c'helenner SES a veze ganto atav. Lod liseidi o deus enrollet ar roadennoù e-pad o frantadoù dieub ivez. Diaesterioù zo bet merzet. Da skouer, pa veze start adlenn ar respontoù dornskrivet peotramant pa ne oa ket bet doujet ouzh ar meneg « 3 abeg d'ar muiañ ». Gwiriet hag unanet eo bet an holl respontoù ebarzhet gant al liseidi.

## **1.4. Kodiñ ar roadennoù**

Daou seurt roadennoù zo bet krouet goude ma vefe bet enrollet an holl respontoù : rummadoù ha feuriaderioù. Ar rummadoù zo anezho disoc'h kroaziañ meur a respont. Ar feuriaderioù zo anezho disoc'h sammadoù poentoù bet lakaet da veur a respont.

### **1.4.1. Sevel rummadoù**

#### **◆ Familhoù « doubl »**

Diskoachet eo bet al liseidi o deus ur breur pe ur c'hoar e lise Diwan Karaez evit gallet tremen eus al liseidi da familhoù al liseidi hep kontañ div wech ar memes familhoù.

#### **◆ Breizh-Uhel / Breizh-Izel**

Bet savet diwar kumun bevañ al liseidi.

#### **◆ Barregezh yezh ar familh**

7 rummad zo bet savet da gentañ :

- BZG Tad Mamm : Tad ha mamm a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h
- BZG Tad : An tad hepken a oar brezhoneg, ar vamm a oar un tamm pe tamm ebet
- BZG Mamm : Ar vamm hepken a oar brezhoneg, an tad a oar un tamm pe tamm ebet
- BZG- Tad Mamm : tad ha mamm a oar brezhoneg un tammig
- BZG- Tad : An tad hepken a oar brezhoneg un tammig, ar vamm ne oar ket
- BZG- Mamm : Ar vamm hepken a oar brezhoneg un tammig, an tad ne oar ket
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.

3 rummad zo bet savet goude-se :

- BZG : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg.
- BZG- : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg un tammig.
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.

Ur pevare rummad zo bet ouzhpennet goude o tispertiañ ar familhoù BZG o lakaat d'un tu ar re a dreuzkas brezhoneg d'o bugale (1 pe 2 dreuzkaser) ha d'un tu all ar re ne dreuzkasont ket :

- BZG T : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg hag a zreuzkas ar yezh d'o bugel.
- BZG : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg met ne dreuzkasont ket.
- BZG- : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg un tammig.
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.

### ◆ Santimant ar familh ouzh ar brezhoneg

- 3 rummad zo bet savet diwar santimant an tad hag ar vamm ouzh ar brezhoneg hervez o bugel :
- 2 TOMM : Tad ha mamm zo tomm ouzh ar brezhoneg (tomm = tomme-tre + tomm a-walc'h)
  - 1 TOMM : An tad pe ar vamm zo tomm ouzh ar brezhoneg
  - 0 TOMM : Nag an tad nag ar vamm n'int tomm ouzh ar brezhoneg.

### ◆ Niver a dreuzkaserien er familh

- 4 rummad zo bet savet diwar emzalc'h treuzkas an tadoù hag ar mammoù :
- 2 DREUZKASER : Tad ha mamm a gomz brezhoneg ouzh o bugel atav pe kement hag en ur yezh all
  - 1 TREUZKASER Mamm : Ar vamm a gomz brezhoneg ouzh he bugel atav pe kement hag en ur yezh all
  - 1 TREUZKASER Tad : An tad a gomz brezhoneg ouzh e vugel atav pe kement hag en ur yezh all
  - 0 TREUZKASER : Nag an tad nag ar vamm ne gomzont brezhoneg ouzh o bugel atav pe kement hag en ur yezh all.

#### 1.4.1. Sevel feuriadurioù

Meur a feuriader zo bet savet o reiñ poentoù da respontoù zo bet roet gant al liseidi hag o sammañ ar poentoù-se. Sed amañ dindan un tamm displegadenn war ar mod m'eo bet savet pep hini anezho.

### ◆ Santimant war o live brezhoneg gant al liseidi

- Goulennet zo bet gant al liseidi peseurt live brezhoneg o doa war pemp tachenn (geriaoueg, geriaoueg ar santimantoù, yezhadur, distagadur, troioù-lavar...). Roet hon eus poentoù d'ar respontoù hervez an derez dibabet : 4 foent evit « mat », 3 foent evit « mat a-walc'h », 2 boent evit « etre », 1 poent evit « bresk ».
- Etre 5 ha 20 poent a c'helle kaout al liseidi. Savet hon eus ur skeul evit muzuliañ ar santimant hollek :
- etre 5 hag 8 poent : live bresk
  - etre 9 ha 12 poent : live etre
  - etre 13 ha 16 poent : live mat a-walc'h
  - etre 17 hag 20 poent : live mat

### ◆ Kementad pleustroù sevenadurel al liseidi

- Goulennet zo bet gant al liseidi pegen alies e veze lennet, kanet, darempredet mediaoù brezhonek gante. Roet hon eus poentoù d'ar respontoù hervez an derez dibabet : 3 foent evit « alies », 2 boent evit « a-wechoù », 1 poent evit « james ». Etre 3 ha 9 foent a c'helle kaout al liseidi. 8 zo bet d'ar muiañ. Savet hon eus ur skeul evit muzuliañ ar pleustroù sevenadurel e brezhoneg :
- 3 ha 4 foent : netre pe dost
  - 5 ha 6 poent : gwan pe etre
  - 7 hag 8 poent : kreñv

### ◆ Live treuzkas er familh

Lakaet zo bet 4 live treuzkas er familh (kreñv, etre, gwan, n'eus ket), diouzh ar c'hementad a vrezhoneg a vez gant an tad ha gant ar vamm pa vez o kaozeal ouzh e / he bugel.

Mamm / tad	Atav	50 %	A-wechoù	James
Atav	Treuzkas kreñv			
50 %		Treuzkas etre		
A-wechoù			Treuzkas gwan	
James				N'eus ket

Lenn : Ul live treuzkas er familh « etre » a zo pa gomz ar vamm e brezhoneg ouzh he bugel atav hag an tad james.

## ◆ Neuz yezhel ar familhoù

Gallout a reer soñjal e vez lañsus pe lañsusoc'h ar familhoù evit ma teufe ar brezhoneg ur yezh perc'hennet da vat gant o bugale. Klasket e vez priziañ live broud ar familhoù en ur gemer harp war teir elfenn eus neuz yezhel ar familhoù : barregezh ar gerent war ar brezhoneg, santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg ha live treuzkas.

- Barregezh ar familh : 2 boent pa vez an tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg, 1 poent pa vez an tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar un tamm brezhoneg, poent ebet pa ne vez hini ebet a oar brezhoneg.

- Santimant ar familh : 2 boent pa vez tomm ouzh ar brezhoneg an tad hag ar vamm, 1 poent pa vez tomm an tad pe ar vamm, poent ebet pa ne vez ket tomm nag unan nag egile.

- Treuzkas er familh : 3 foent pa vez kreñv an treuzkas, 2 boent pa vez etre an treuzkas, 1 poent pa vez gwan an treuzkas, poent ebet pa ne vez ket treuzkas ebet.

Etre 0 ha 7 poent e c'hell kaout ar familhoù :

- 0-1 poent : familhoù pell diouzh ar brezhoneg

- 2-3 foent : familhoù klouar e-keñver ar brezhoneg

- 4-5 poent : familhoù desachet gant ar brezhoneg

- 6-7 poent : familhoù brezhonek penn-kil-ha-troad

## ◆ Profil brezhonek al liseidi

Ar pal a oa muzuliañ kreñvder liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg. Tri dezverk hon eus kemeret harp warne :

- **ar santimant barregezh** : hag ar santimant o deus mestroniañ ar brezhoneg ? Ha fiziañs o deus en o barregezh ?

- **an tan** : ha tomm eo o c'halon ouzh ar brezhoneg ? Ha stourm a reont evit lakaat ar yezh da lufrañ, evit ma chomfe bev ar yezh ?

- **ar soubenn** : pegen stank eo o implij eus ar brezhoneg war ar pemdez, er-maez eus al lise ? Pegen soubet int e-barzh ar yezh ?

Diaes eo gouzout hag-eñ zo unan eus an dezverkoù-se en deus ur pouez kreñvoc'h eget an daou all, se a zepand eus an dud. Divizet hon eus reiñ ar memes talvoudegezh tamm pe damm d'an tri dezverk-se. Evit aesaat al labour hon eus implijet un nebeud muzulioù a oa deuzoute c'hoazh (da skouer : santimant barregezh war ar brezhoneg).

Sed aze penaos hon eus dasparzhet ar poentoù :

- **ar santimant barregezh (20 poent d'ar muiañ)** :

\* Petra eo da santimant war da live brezhoneg hiziv ? 5 tachenn ha 4 live barregezh, etre 5 hag 20 poent.

- **an tan (24 foent d'ar muiañ)** :

\* Pegen tomm en em santez ouzh ar brezhoneg ? 4 derez, etre 3 ha 12 poent.

\* Ha kemer a rez perzh, mod pe vod, er stourm evit ar brezhoneg ? 4 derez, etre 3 ha 12 poent.

- **ar soubenn (25 poent d'ar muiañ)** :

\* Ha komz a ra da vamm brezhoneg ouzhit ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.

\* Ha komz a rez brezhoneg ouzh da vamm ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.

> sammet eo bet ar respontoù-se ha rannet dre zaou : etre 1 ha 4 foent en holl.

\* Ha komz a ra da dad brezhoneg ouzhit ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.

\* Ha komz a rez brezhoneg ouzh da dad ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.

> sammet eo bet ar respontoù-se ha rannet dre zaou : etre 1 ha 4 foent en holl.

\* Ha komz a rez brezhoneg gant da vreudeur ha c'hoarezed ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.

\* Ha komz a rez brezhoneg gant da dud-kozh ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.

\* Pegen stank eo da bleustroù sevenadurel e brezhoneg (lenn, kanañ, klewelet) ? 3 zachenn, 3 derez, etre 3 ha 9 foent.

Pa ne oa ket respont ebet d'ur goulenn eo bet roet an niver bihanañ a boentoù.

Etre 18 ha 69 foent e c'helle bezañ ez teorik. Etre 18 ha 63 zo bet en gwirionez, ar pezh a dalvez 46 live.

Savet hon eus 4 rummad diwarne :

- rummad etre 18 ha 28 poent : al liseidi pell diouzh ar brezhoneg

- rummad etre 29 ha 39 foent : al liseidi glouar e-keñver ar brezhoneg

- rummad etre 40 ha 51 poent : al liseidi desachet gant ar brezhoneg

- rummad etre 52 ha 63 foent : al liseidi brezhonek penn-kil-ha-troad.

## 1.6. Doare kinnig ar respontoù

Liseidi zo n'o deus ket respontet d'an holl c'houlennoù. 302 respont a c'hell bezañ d'ur goulenn, 310 d'unan all da skouer. Pa ne vez linenn ebet en taolennoù o venegiñ « respont ebet » e talv eo bet jedet an dregantadoù hep kemer e kont an dud n'o deus ket respontet d'ar goulenn-se.

Pouezus eo kaout soñj eo al liseidi o deus respontet d'ar goulennoù. Pa vez kaoz eus barregezh o zud war ar brezhoneg pe eus santimant o zud ouzh ar brezhoneg eo sell al liseidi war an traoù-se a zo dastumet aze ha n'eo ket dre ret ar pezh o dije respontet o zud o-unan.


## 2. AN DISOC'HOÙ SIMPL

### 2.1. Al liseidi

315 lisead a oa skoliataet e lise Diwan Karaez en miz Kerzu 2019. 314 lisead zo bet goulnnataet ganeomp.


#### 2.1.1. Piv eo al liseidi ?

##### ◆ Reizh



Diazez : 314 lisead  
Lenn : 47 % eus al liseidi zo paotred.

##### ◆ Bloaz ganedigezh




Diazez : 314 lisead  
Lenn : 110 lisead zo ganet e 2004.


##### ◆ Live klas

	Niver a glasadoù	Niver a dud
Eilvet	4	108
Kentañ	3	99
Termen	4	107


Diazez : 314 lisead  
Lenn : 4 c'hlasad Termen a vod 107 skoliad Termen, da lâret eo 34 % eus al liseidi.



##### ◆ Lec'h bevañ



Diazez : 314 lisead  
Lenn : 61 % eus al liseidi zo o chom e Penn-ar-Bed.




Diazez : 314 lisead  
Lenn : 89 % eus al liseidi zo o chom e Breizh-Izel.




## ◆ Skoliata kent

### Kentañ derez




Diazez : 314 lisead  
 Lenn : 25 % eus al liseidi a oa skoliataet e klasoù divyezhek publik er c'hentañ derez.

### Skolaj



Diazez : 314 lisead  
 Lenn : 25 % eus al liseidi zo o tont eus skolaj Diwan ar Releg.




Diazez : 314 lisead  
 Lenn : 30 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Plijidi a oa skoliataet en ur c'hlas divyezhek publik er c'hentañ derez.

## 2.1.2. Al liseidi hag ar brezhoneg

### ◆ C'hoant gouzout hiroc'h war an enklask-mañ

70 % a fellfe dezho resev disoc'hoù an enklask.  
 47 % a vefe prest da vezañ aterset ma vefe ezhomm.


### ◆ O santimant war o live brezhonek



Diazez : etre 311 ha 313 lisead  
 Lenn : 15 % eus al liseidi a gav dezho o deus ul live mat e yezhadur.

## Santimant hollek war o live brezhoneg


Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù p.4.



Diazez : 313 lisead

Lenn : 48 % eus al liseidi a gav dezho o deus ul live brezhoneg mat a-walc'h.

### ◆ O santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 312 lisead

Lenn : 30 % eus al liseidi eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

### ◆ Implij ar brezhoneg gant o mignoned

Ha mignoned 'teus (e-barzh pe er-maez eus al lise), ha brezhoneg ar yezh voas etrezoc'h er-maez eus al lise ?



Diazez : 308 lisead

Lenn : 17 % eus al liseidi o deus disklêriet kaout 6 mignon pe muioc'h ma vez ar brezhoneg ar yezh voas evit komz ganto.

**Evezhiadenn** : Lod eus al liseidi o deus komprenet "ar yezh voas" evel "la langue habituelle" ha reoù all evel "une langue habituelle". Gant se zo lod a zo kustum da gomz brezhoneg gant mignoned zo er-maez eus al lise (ha galleg ivez) o deus respontet ne raent ket peogwir o deus komprenet "la langue habituelle" ha lod all o deus respontet e komzent brezhoneg er-maez eus al lise gant ouzhpenn 6 mignon, padal e komzont brezhoneg gante a-wechoù hepken. Diaes eo tennañ gounid eus ar sifroù-se eta.

## ◆ Implij ar brezhoneg evit komz ouzh o zud


Evit ar goulenn-mañ n'hon eus kemeret e kont nemet al liseidi o deus un tad pe ur vamm, pe an daou, a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h.

94 lisead o deus ur vamm a oar brezhoneg (65 a oar mat, 29 a oar mat a-walc'h).

89 lisead o deus un tad a oar brezhoneg (65 a oar mat, 24 a oar mat a-walc'h).

Hiziv, ha komz a rez brezhoneg ouzh da vamm ? [ouzh da dad ?]

Atav pe dost     Kement e brezhoneg hag en ur yezh all     A-wechoù     Ne ran ket



Diazez mamm : 92 lisead

Diazez tad : 85 lisead

Lenn : 13 % eus al liseidi e oar brezhoneg o mamm a gomz brezhoneg outi atav pe dost.

		Ar vamm a gomz e brezhoneg ouzh he bugel...			
		Atav	Kement hag en ur yezh all	A-wechoù	James
Ar bugel a gomz e brezhoneg ouzh e / he mamm	Atav	92 %	0	0	0
	Kement hag en ur yezh all	0	100 %	2 %	0
	A-wechoù	8 %	0	91 %	0
	James	0	0	7 %	100 %

Diazez : 92 lisead


Lenn : 92 % eus al liseidi o deus ur vamm a gomz brezhoneg oute atav a gomz outi e brezhoneg atav.

		An tad a gomz e brezhoneg ouzh e vugel...			
		Atav	Kement hag en ur yezh all	A-wechoù	James
Ar bugel a gomz e brezhoneg ouzh e / he zad	Atav	80 %	0	0	0
	Kement hag en ur yezh all	17 %	80 %	0	0
	A-wechoù	3 %	13 %	82 %	0
	James	0	7 %	18 %	100 %

Diazez : 85 lisead

Lenn : 80 % eus al liseidi o deus un tad a gomz brezhoneg oute atav a gomz outañ e brezhoneg atav.


## ◆ Implij ar brezhoneg gant ar breudeur ha/pe ar c'hoarezed



Diazez : 287 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg

Lenn : 64 % eus al liseidi a gomz brezhoneg d'o breudeur ha/pe d'o c'hoarezed a-wechoù.

## ◆ Implij ar brezhoneg gant an dud-kozh




Diazez : 207 lisead o deus tud-kozh a oar(e) brezhoneg

Lenn : 9 % eus al liseidi o deus pe o deus bet tud-kozh vrezhonek a gomz(e) brezhoneg gante atav.

Evezhiadenn : A c'hell bezañ en o zouez liseidi a gomz atav brezhoneg gant lod eus o zud-kozh brezhonek ha james gant lod all, daoust dezho bezañ brezhonegerien ivez.

## ◆ Pleustroù sevenadurel brezhonek (er-maez eus al labour skol)




Diazez : etre 309 ha 312 lisead

Lenn : 10 % eus al liseidi a gan e brezhoneg alies.

## Kementad pleustroù sevenadurel dre vras


Gwelet penaos eo bet savet ar feuriader-se p.5.



Diazez : 312 lisead

Lenn : 6 % eus al liseidi o deus pleustroù sevenadurel brezhonek kreñv.

## ◆ Perzh er stourm evit ar brezhoneg (buhez kevredigezhel, stourm politikel, krouiñ, manifestiñ...)



Diazez : 312 lisead

Lenn : 27 % eus al liseidi ne gemeront ket perzh tamm ebet er stourm evit ar brezhoneg.


Evezhiadenn : An doareoù stourm pennañ meneget gant al liseidi : manifestadegoù (meneget gant 37 % anezho), perzh er vuhez kevredigezhel (8%), Redadeg (7%), stourm evit ar breved pe ar bak e brezhoneg (6%), sinadegoù ha perzh e tabutoù (6%)...

## ◆ Raktres treuzkas ar brezhoneg d'ar vugale

Ma 'tefe bugale un deiz bennak, en em welout a rafes komz brezhoneg outo...


- Atav pe dost       E brezhoneg kement hag en ur yezh all       A-wechoù       Nebeut-tre pe james  
 Se zepanto eus ma fried       N'ouzon ket

### Gant an holl liseidi, bet graet o soñj gante pe get



Diazez : 308 lisead  
 Lenn : 22 % eus al liseidi zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

### Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken



Diazez : 238 lisead  
 Lenn : E-touez al liseidi o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 28 % zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

## 2.2. Mammoù ha tadoù al liseidi

314 lisead zo met 22 koublad breudeur / c'hoarezed zo en o zouez. 292 « familh » zo en holl eta (familh a vez graet eus ar c'houblad kerent pe eus ar vamm hec'h-unan pa ne vez ket tad pe mamm all ebet). Titouroù hon eus diwar-benn 292 mamm ha 287 tad. Cheñch-dicheñch eo an niver a dud e pep rummad avat kar lod eus al liseidi n'o deus ket respontet d'an holl c'houlennoù.

Bezit war evezh ! Er rannbennad-mañ e vo roet sifroù war an tadoù hag ar mammoù, ha n'eo ket war al liseidi. Lâret e vo da skouer ez eus 87 mamm a oar brezhoneg e-touez mammoù al liseidi, ha ne vo ket lâret ez eus 94 lisead o deus ur vamm hag a oar brezhoneg.


### 2.2.1. Piv int ?

#### ◆ Bloaz ganedigezh

Mammoù : etre 1958 ha 1982 int ganet. 1971 eo ar geidenn vloaz.


Tadoù : etre 1946 ha 1980 int ganet. 1968 eo ar geidenn vloaz.

### ◆ Lec'h orin




Diazez lec'h orin : 270 mamm ha 265 tad (535)  
 Lenn : 22 % eus kerent al liseidi o deus tremenet o bugaleaj e Bro-C'hall.

### ◆ Lec'h bevañ



Diazez lec'h bevañ : 286 mamm ha 269 tad (555)  
 Lenn : 20 % eus kerent al liseidi zo o chom en Aodoù-an-Arvor.

### ◆ Live studi an tadoù hag ar mammoù




Diazez : 286 mamm ha 274 tad (560)  
 Lenn : 29 % eus kerent al liseidi o deus diplomoù Bak +4 ha muioc'h hervez o bugale.

Evezhiadennoù : Diaes eo kaout fiziañs er sifroù-se abalamour d'an niver uhel a liseidi na oaront ket respont ha d'ar re o deus respontet a-dreuz (anat pa geñverier ar vicher gant al live studi embannet, respontoù disheñvel gant ar breudeur hag ar c'hoarezed...).

Ar mammoù o deus diplomoù uheloc'h eget an tadoù (59% eus ar mammoù ha 48% eus an tadoù o deus diplomoù Bak +2 pe muioc'h).


## 2.2.2. O barregezh war ar brezhoneg

### ◆ Ha goût a reont brezhoneg ?



Diazez : 292 mamm ha 286 tad (578)  
 Lenn : 21 % eus tadoù al liseidi a oar brezhoneg mat.

## ◆ Pegoulz o deus desket ?




■ A-raok ganedigezh o bugel kentañ ■ Kroget a-raok, peurlipet goude ■ Goude ganedigezh o bugel kentañ

Diazez : 85 mamm ha 79 tad (164)

Lenn : 44 % eus ar mammoù ha 67 % eus an tadoù brezhonek o deus desket brezhoneg a-raok kaout o bugel kentañ.

## ◆ Penaos o deus desket ?


### Mod deskiñ ar gerent



Diazez : 87 mamm ha 84 tad (171)

Lenn : 22 % eus ar gerent vrezhonek o deus desket brezhoneg gant tud all en o familh.

## Mod deskiñ ar gerent hervez ar rummadoù oad




Diazez : 171 mamm ha tad brezhonek (67 ganet a-raok 1970, 87 ganet goude 1970 ha 17 n'eo ket bet resisaet o bloavezh ganedigezh)

Lenn : 25 % eus ar gerent brezhonek ganet a-raok 1970 o deus desket brezhoneg o-unan.

Evezhiadenn : Sammadoù ar rummadoù oad ne glotont ket dre ret gant an hollad, kar n'eo ket bet resisaet bloaz ganedigezh an holl dud.

### 2.2.3. 0 santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 268 mamm ha 262 tad (530)

Lenn : 6 % eus mammoù al liseidi ha 14% eus an tadoù ne reont forzh eus ar brezhoneg hervez o bugale.

Evezhiadenn : 21 mamm ha 18 tad n'eo ket gouest o bugale lâret pegen tomm int ouzh ar brezhoneg.


### 2.2.4. Treuzkas ar brezhoneg dre ar skol

#### ◆ An abegoù skoliata brezhonek

*D'az soñj, peseurt abegoù pennañ o deus broudet da dud da gas ac'hanout d'ur skol vrezhonek ?*

- |  |  |
|--|--|
| <input type="checkbox"/> Skol gevredigezhel, perzh ar gerent er skol | <input type="checkbox"/> Pedagogiezh plijus, kelennerien sichant |
| <input type="checkbox"/> Evit saveteiñ ar brezhoneg                  | <input type="checkbox"/> Skol vihan, aergelc'h familh            |
| <input type="checkbox"/> Skol dostañ an ti                           | <input type="checkbox"/> Evit ar sevenadur                       |
| <input type="checkbox"/> Evit ma vefe desket brezhoneg ganin         | <input type="checkbox"/> N'ouzon ket                             |
| <input type="checkbox"/> Evit an divyezhegezh abred, ar spered digor |  |






Diazez : 314 lisead

Lenn : 65 % eus al liseidi a soñj dezho int bet skoliataet e brezhoneg peogwir e felle d'o zud e vefe desket brezhoneg gante.

### ◆ Eskemmoù kerent / liseidi diwar-benn abegoù ar skoliata brezhonek

Ha tro 'peus bet da gomz eus abegoù ar skoliata brezhonek gant da dud ?




Diazez : 301 lisead

Lenn : 54 % eus al liseidi a zisklêr bezañ bet komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

### ◆ Youl an dud da gas o bugel d'ur skol vrezhonek

Hag unan (tad pe mamm) a oa mennetoc'h eget egile gant ar raktres skoliata brezhonek ?




Diazez : 306 lisead

Lenn : 47 % eus al liseidi a soñj dezho e oa o zad ken mennet hag o mamm gant ar raktres skoliata brezhonek.

## 2.2.5. Treuzkas ar brezhoneg er familhoù

Ne vez kemeret e kont amañ nemet an tadoù hag ar mammoù a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h.


### ◆ Ha komz a rae an tadoù ha ar mammoù brezhoneg d'o bugel pa oa 5 bloaz ?



Diazez : 87 mamm ha 81 tad (168)

Len : 20 % eus mammoù brezhonek al liseidi a gomze brezhoneg atav d'o bugel pa oa 5 bloaz.

### ◆ Ha komz a ra an tadoù ha ar mammoù brezhoneg d'o bugel hiziv ?



Diazez : 86 mamm ha 80 tad (166)

Len : 14 % eus mammoù brezhonek al liseidi a gomz brezhoneg atav d'o bugel hiziv.

## 2.3. Neuz yezhel familhoù al liseidi

Er rannbennad-mañ e vo produet daou rummad sifroù :


- sifroù war familhoù al liseidi : « familh » vo graet eus an **292 koubladoù teorik tad-mamm**, daoust ma n'eus nemet ar vamm e familhoù zo ha daoust ma vez dispartiet lod eus ar c'houbladoù-se.
- sifroù war al liseidi e-lec'h ma vo kaoz eus situasion familh pep lisead o c'houzout ez eus **314 lisead**.

Anat eo e vo tost-tre an dregantadoù familhoù ha liseidi. Pep hini a c'hello sachañ ar sifroù a zedenno anezhañ avat, diouzh e ezhommoù.

### 2.3.1. Barregezh ar gerent war ar brezhoneg


Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù p.4.

#### Familhoù



Diazez : 292 familh  
Lenn : E 47% eus ar familhoù e oar brezhoneg an tad ha/pe ar vamm (BZG).

#### Liseidi




Diazez : 314 lisead  
Lenn : 36 % eus al liseidi o deus un tad ha/pe ur vamm a oar brezhoneg un tamm (BZG-).

### 2.3.2. Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg


Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù p.5.

#### Familhoù



Diazez : 292 familh  
Lenn : 43 % eus ar familhoù a zo enno un tad hag ur vamm hag a zo tomm ouzh ar brezhoneg.

#### Liseidi




Diazez : 314 lisead  
Lenn : 44 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg.

### 2.3.3. Treuzkas brezhoneg

#### ◆ Niver a dreuzkaserien er familhoù


Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù p.5.

##### Familhoù



Diazez : 292 familh  
 Lenn : E 12% eus ar familhoù (36 familh) e vez treuzkaset ar brezhoneg gant an tad hepken.

##### Liseidi




Diazez : 314 lisead  
 Lenn : 3% eus al liseidi (10 lisead) e vez komzet brezhoneg dezho er gêr gant o zad hag o mamm atav pe kement hag en ur yezh all.

#### ◆ Live an treuzkas er familhoù


Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù p.5.

##### Familhoù



Diazez : 292 familh  
 Lenn : 7 familh (da lâret eo 2% eus ar familhoù) a dreuzkas kreñv ar brezhoneg d'o bugale.

##### Liseidi




Diazez : 314 lisead  
 Lenn : 77% eus al liseidi ne vez ket treuzkaset dezho ar brezhoneg gant o zud tamm ebet.

### 2.3.4. Ur feuriader hollek « neuz yezhel ar familh »


Gant ar feuriader-se e fell deomp renkañ ar familhoù diouzh pegen lañsus int evit o bugel mont war-zu perc'hennañ ar brezhoneg. Teir elfenn zo bet kemeret e kont evit sevel ar feuriader-se : barregezh ar gerent war ar brezhoneg, o santimant ouzh ar brezhoneg hag al live treuzkas er familh. Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù p.6.

#### Familhoù



Diazez : 292 familh  
Lenn : 22 % eus ar familhoù zo pell diouzh ar brezhoneg (n'int ket tomm ouzh ar brezhoneg, ne oaront ket brezhoneg, ne dreuzkasont ket brezhoneg).

#### Liseidi



Diazez : 314 lisead  
Lenn : 22 % eus al liseidi o deus familhoù pell diouzh ar brezhoneg.

### 3. AN DISOC'HOÙ KROAZIET

El lodenn-se e vo klasket lakaat war-wel elfennoù a c'hell levezoniñ liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg.

Studiet e vo tri seurt levezon a c'hell bezañ :

- levezon an elfennoù sokiodemografek (an oad hag ar jener)
- levezon ar skoliata (ar c'hlas, an hentad skoliata)
- levezon ar familh (barregezh yezh ar gerent, santimant ar gerent, treuzkas gant ar gerent).

E-keñver al liamm etre ar brezhoneg hag al liseidi e vo studiet pevar ferzh anezhañ :


- ar santimant barregezh war ar brezhoneg (hag en em santout a ra al lisead barrek war ar brezhoneg ?)
- an « tan » (pegen tomm eo al liseidi ouzh ar brezhoneg ? Peseurt perzh o deus er stourm ? Ha klasket o deus kompren choaz o zud skoliata anezho e brezhoneg ?)
- ar « soubenn » (pegen stank eo o implij eus ar brezhoneg gant o zud, o zud-kozh, o breudeur ha/pe c'hoarezed, e-keñver pleustroù sevenadurel... ?)
- ar raktres treuzkas (ha c'hoant o deus da gomz brezhoneg d'o bugale ?).

#### 3.1. Levezon an elfennoù sokiodemografek

##### 3.1.1. Al live klas

Etre 2001 ha 2005 e oa ganet al liseidi, met ar braz anezho zo ganet etre 2002 ha 2004. Kentoc'h evit kemer harp war ar bloaz ganedigezh hon eus diazezet ar rannbennad-se war al live klas : Eilvet, Kentañ, Termen. Ha merzout a reer e vez disheñvel al liamm etre al liseidi hag ar brezhoneg hervez al live klas ? Ne verzer ket diforc'hioù bras a-fed neuz yezhel familhoù al liseidi (barregezh ar gerent + o santimant ouzh ar brezhoneg + treuzkas er familh) hervez al live klas.

##### ◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 313 lisead

Lenn : 25 % eus al liseidi e Termen klas a gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.

##### ◆ An tan


##### Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 312 lisead

Len : 32 % eus al liseidi e Eilvet klas eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.


**Perzh er stourm**



Diazez : 312 lisead

Len : 6 % eus al liseidi e Kentañ klas a zisklêr stourm kalz evit ar brezhoneg.

**Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata**




Diazez : 301 lisead

Len : 51 % eus al liseidi Eilvet klas o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

**◆ Ar soubenn**

**Komz ouzh o mamm**



Diazez : 314 lisead

Len : 6 % eus al liseidi en Eilvet klas ne gomzont ket brezhoneg d'o mamm daoust ma oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h. 76 % eus al liseidi Kentañ klas ne oar ket brezhoneg o mamm.


**Komz ouzh o zad**



Diazez : 314 lisead

Lenn : 10 % eus al liseidi e Kentañ klas a gomz brezhoneg d'o zad atav.


**Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed**



Diazez : 287 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg

Lenn : 5 % eus al liseidi e Termen klas o deus breudeur ha/pe c'hoarezed brezhonek e komzont brezhoneg ganto atav.


**Komz gant o zud-kozh**



Diazez : 207 lisead o deus tud-kozh a oar(e) brezhoneg

Lenn : 4 % eus al liseidi e Termen klas a gomz brezhoneg atav gant o zud-kozh pe lod anezho.

**Pleustroù sevenadurel brezhonek**




Diazez : 312 lisead

Lenn : 54 % eus al liseidi e Eilvet klas n'o deus ket a bleustroù sevenadurel e brezhoneg pe nebeut-tre.



## ◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale




Diazez : 308 lisead

Lenn : 2 % eus al liseidi e Termen klas n'emaint ket en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale.

### 3.1.2. Ar jener

Ne verzer ket diforc'hioù bras a-fed neuz yezhel familhoù al liseidi (barregezh ar gerent + o santimant ouzh ar brezhoneg + treuzkas er familh) hervez ar jener.

## ◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 313 lisead

Lenn : 29 % eus al liseadezed a gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.

## ◆ An tan


### Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 312 lisead

Lenn : 23 % eus ar baotred eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.


### Perzh er stourm



Diazez : 312 lisead

Lenn : 7 % eus al liseadezed a zisklêr stourm kalz evit ar brezhoneg.

## Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata



Diazez : 301 lisead

Lenn : 42 % eus paotred al lise o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.


### ◆ Ar soubenn

#### Komz ouzh o mamm



Diazez : 314 lisead


Lenn : 76 % eus paotred al lise ne oar ket brezhoneg o mamm. Ma vez kaoz eus al liseidi a oar brezhoneg o mamm (94 lisead) zo 11 % eus ar baotred ha 14 % eus ar merc'hed a gomz brezhoneg dezhi atav.



Diazez : 87 lisead e oar brezhoneg o mamm


Lenn : 14% eus ar merc'hed hag 11% eus ar baotred a gomz brezhoneg d'o mamm atav.

#### Komz ouzh o zad



Diazez : 314 lisead


Lenn : 70 % eus paotred al lise ne oar ket brezhoneg o zad.



Diazez : 84 lisead e oar brezhoneg o zad

Lenn : 28% eus ar merc'hed ha 33% eus ar baotred a gomz brezhoneg d'o zad atav.

### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed




Diazez : 287 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg  
 Lenn : 19 % eus al liseadezed ne gomzont ket brezhoneg gant o breudeur ha/pe c'hoarezed james.

### Komz gant o zud-kozh


N'eus ket diforc'hioù splann paotred / merc'hed.

### Pleustroù sevenadurel brezhonek




Diazez : 312 lisead  
 Lenn : 9 % eus al liseadezed o deus pleustroù sevenadurel kreñv e brezhoneg.

### ◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 308 lisead  
 Lenn : 25 % eus paotred al lise ne oaront ket hag-eñ komzint brezhoneg d'o bugale pe get.

### Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken



Diazez : 238 lisead  
 Lenn : E-touez ar merc'hed o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 50 % zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale kement hag en ur yezh all.

## 3.2. Levezon an hentad skoliata


Hentoù skoliata un tamm disheñvel zo bet heuliet gant liseidi Diwan. Er c'hentañ derez e oa 70 % anezho e skolioù Diwan padal e oa ar peurrest e klasoù divyezhek publik ha katolik dreist-holl. Tost an holl zo en em gavet goude e unan eus ar 6 skolaj Diwan. Ha merzout a reer e vez disheñvel al liamm etre al liseidi hag ar brezhoneg hervez o hentenn skoliata er c'hentañ derez hag hervez o skolaj orin ?

### 3.2.1. Ar skoliata er c’hentañ derez

Ne vo kemeret e kont er rannbennad-mañ nemet al liseidi bet skoliataet e Diwan (220 den) pe klasoù divyezhek publik (77 den) ha katolik (9 den), da lâret eo 306 en holl. An 8 lisead all zo bet skoliataet lec’h all pe n’o deus ket respontet d’ar goulenn-se.

Ne verzer ket diforc’hioù bras a-fed neuz yezhel familhoù al liseidi (barregezh ar gerent + o santimant ouzh ar brezhoneg + treuzkas er familh) hervez an hentenn skoliata er c’hentañ derez.

#### ◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 305 lisead

Lenn : 45 % eus al liseidi bet e klasoù divyezhek katolik pa oant er c’hentañ derez a gav dezho e komzont mat brezhoneg.

#### ◆ An tan


##### Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 304 lisead

Lenn : 29 % eus al liseidi bet er c’hentañ derez e Diwan eo tomm-tre o c’halon ouzh ar brezhoneg.


##### Perzh er stourm



Diazez : 304 lisead

Lenn : 29 % eus al liseidi bet en ur skol Diwan pa oant er c’hentañ derez ne gemeront ket perzh er stourm evit ar brezhoneg.

## Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 294 lisead

Lenn : 57 % eus al liseidi bet en ur skol Diwan pa oant er c'hentañ derez o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

### ◆ Ar soubenn


#### Komz ouzh o mamm



Diazez : 306 lisead

Lenn : 8 % eus al liseidi bet en ur c'hlas divyezhek publik pa oant er c'hentañ derez ne gomzont ket brezhoneg d'o mamm daoust ma oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h.

#### Komz ouzh o zad



Diazez : 306 lisead

Lenn : 10 % eus al liseidi bet en ur skol Diwan pa oant er c'hentañ derez a gomz brezhoneg d'o zad atav.

### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed

#### Komz gant o zud-kozh

#### Pleustroù sevenadurel brezhonek


#### Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale

N'eus ket diforc'hioù splann Diwan / klas divyezhek publik / klas divyezhek katolik.

### 3.2.2. Ar skolaj orin

Ne vo kemeret e kont er rannbennad-mañ nemet al liseidi bet skoliataet en ur skolaj Diwan, da lâret eo 310 en holl (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned). Ar 4 lisead all zo bet skoliataet lec'h all pe n'o deus ket respontet d'ar goulenn-se.

#### ◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 309 lisead

Lenn : 27 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Gwiseni a gav dezho e komzont brezhoneg mat.

#### ◆ An tan


##### Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 308 lisead

Lenn : 45 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Gwened eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.


##### Perzh er stourm



Diazez : 308 lisead

Lenn : 34 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Naoned a gemer kalz a berzh er stourm evit ar brezhoneg.

## Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 297 lisead

Lenn : 68 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Kemper o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

### ◆ Ar soubenn

#### Neuz yezhel ar familh



Diazez : 310 lisead


Lenn : 11 % eus al liseidi bet skoliataet e skolaj Naoned zo o tont eus familhoù brezhonek penn-kil-ha-troad.

### Komz ouzh o mamm

#### Komz ouzh o zad

N'eus ket diforc'hoù splann pa geñverier ar 6 skolaj Diwan.


#### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed



Diazez : 283 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg


Lenn : 8 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Gwiseni a gomz brezhoneg atav gant o breudeur ha/pe c'hoarezed.

## Komz gant o zud-kozh



Diazez : 310 lisead


Lenn : 56 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Naoned n'o deus na tad-kozh na mamm-gozh ebet a oar brezhoneg.



Diazez : 205 lisead o deus tud-kozh a oar(e) brezhoneg

Lenn : 13 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Kemper a gomz brezhoneg d'o zud-kozh atav.

## Pleustroù sevenadurel brezhonek




Diazez : 308 lisead

Lenn : 58 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan ar Releg n'o deus ket pleustroù sevenadurel e brezhoneg pe dost.



## ◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



■ Atav pe dost ■ Kement hag en ur yezh all ■ A-wechoù ■ Nebeut-tre pe james ■ Se zepanto eus ma fried ■ Ne oaront ket

Diazez : 307 lisead

Lenn : 17 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Plijidi ne oaront ket hag-eñ e komzint brezhoneg d'o bugale pe get.

## 3.3. Levezon neuz yezhel ar familh


### 3.3.1 Barregezh yezh ar gerent ha treuzkas er familh

Evit studiañ levezon barregezh yezh ar gerent war liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg ez eus bet savet pevar rummad :

- al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg hag e vez treuzkaset ar yezh dezho er gêr (63 brezhoneg ha treuzkas)
- al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg met ne vez ket treuzkaset dezho ar yezh er gêr (83 brezhoneg hep treuzkas)
- al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar un tamm brezhoneg (113 brezhoneg un tamm)
- al liseidi eo divrezhonek o zad ha o mamm (55 divrezhonek).

Dispartiañ an tadoù ha mammoù brezhonek a dreuzkas hag ar re ne dreuzkasont ket a vo talvoudus evit gouzout hag-eñ e c'hell ar barregezh hep an treuzkas kaout un efed dispriziañ ar brezhoneg.

## ◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 313 lisead

Lenn : 41 % eus al liseidi a vez treuzkaset ar brezhoneg dezho er gêr gant o zad pe o mamm pe an daou a gav dezho e komzont brezhoneg mat.

## ◆ An tan


## Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 312 lisead

Lenn : 24 % eus al liseidi o deus tud divrezhonek eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.


## Perzh er stourm



Diazez : 312 lisead

Lenn : 5 % eus al liseidi a oar brezhoneg o zud met ne dreuzkasont ket ar yezh dezho a gemer un tamm perzh er stourm evit ar brezhoneg.

## Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 301 lisead

Lenn : 54 % eus al liseidi e oar brezhoneg un tamm o zad pe o mamm pe an daou o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

## ◆ Ar soubenn


### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed



Diazez : 287 lisead o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg

Len : 33 % eus al liseidi a oar brezhoneg o zud met ne dreuzkasont ket ar yezh dezho ne gomzont ket brezhoneg gant o breudeur ha/pe c'hoarezed james.


### Komz gant o zud-kozh



Diazez : 207 lisead o deus tud-kozh a oar(e) brezhoneg

Len : 7 % eus al liseidi a oar un tamm brezhoneg o zud a gomz e brezhoneg atav gant o zud-kozh brezhonek.


### Pleustroù sevenadurel brezhonek



Diazez : 312 lisead

Len : Hini ebet eus al liseidi o deus tad ha mamm divrezhonek n'o deus pleustroù sevenadurel e brezhoneg.


### ◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 308 lisead

Len : 33 % eus al liseidi eo divrezhonek o zud ne oaront ket hag-eñ e komzint brezhoneg d'o bugale pe get.

### Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken



Diazez : 238 lisead


Lenn : E-touez al liseidi o deus ur familh divrezhonek hag o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 24% zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

### 3.3.2. Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg

Evit studiañ levezon santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg war liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg e kemerimp harp war dri rummad :

- al liseidi ma vez tomm pe tomm a-walc'h o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg (137 lisead 2 TOMM)
- al liseidi ma vez tomm pe tomm a-walc'h o zad pe o mamm ouzh ar brezhoneg (109 lisead 1 TOMM)
- al liseidi ma vez tomm pe tomm a-walc'h nag o zad nag o mamm ouzh ar brezhoneg (68 lisead 0 TOMM).

#### ◆ Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 313 lisead

Lenn : 29 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg a gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.

#### ◆ An tan


#### Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 312 lisead

Lenn : 7 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg a zo tomm tre ouzh ar brezhoneg.


## Perzh er stourm



Diazez : 312 lisead

Lenn : 55 % eus al liseidi o deus pe un tad pe ur vamm tomm ouzh ar brezhoneg a stourm un tammig evit ar brezhoneg.

## Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 301 lisead

Lenn : 62 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

## ◆ Ar soubenn


### Komz gant o zud-kozh



Diazez : 207 lisead o deus tud-kozh a oar(e) brezhoneg

Lenn : 13 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg a gomz brezhoneg atav gant o zud-kozh pe lod anezho.


## Pleustroù sevenadurel brezhonek



Diazez : 312 lisead

Len : 48 % eus al liseidi o deus pe un tad pe ur vamm tomm ouzh ar brezhoneg n'o deus ket a bleustroù sevenadurel e brezhoneg pe nebeut-tre.

## ◆ Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 308 lisead


Len : 9 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav m'o defe bugale un deiz bennak.

## 4. PROFIL BREZHONEK AL LISEIDI : UN DIPOLOGIEZH

A-raok klozañ an danevell-mañ e felle deomp klask rummatañ al liseidi hervez an doare liamm, kreñv pe greñvoc'h, gwan pe wanoc'h, o doa gant ar brezhoneg, ha goude-se keñveriañ ar rummadoù liseidi ouzh neuz yezhel o familhoù. Ar goulennoù a oa e-barzh hor penn a oa : daoust hag al liseidi o deus al liamm kreñvañ ouzh ar brezhoneg o deus ur familh brezhonek penn-kil-ha-troad ivez ? Ha bezañ zo liseidi o tont eus familhoù brezhonek penn-kil-ha-troad ha n'int ket dedennet gant ar brezhoneg, d'an oad-mañ d'an nebeutañ ? Er c'hontrol, ha bezañ zo liseidi o tont eus familhoù pell diouzh ar brezhoneg o deus ul liamm kreñv gant ar brezhoneg memestra ?

Gwelet penaos eo bet savet ar feuriader « profil brezhoneger al liseidi » p.6.


### 4.1. Profil brezhonek al liseidi



Diazez : 314 lisead

Lenn : 7 % eus al liseidi zo pell diouzh ar brezhoneg hervez hon tipologiezh.

#### ◆ Reizh




Diazez : 314 lisead

Lenn : 42 % eus ar baotred ha 58 % eus ar merc'hed eo kreñv pe kreñv a-walc'h o liamm gant ar brezhoneg (penn-kil-ha-troad pe desachet).

#### ◆ Hentad skoliata


##### Kentañ Derez



Diazez : 306 lisead

Lenn : 7 % eus al liseidi bet skoliataet e Diwan er c'hentañ derez eo tanav-tanav o liamm ouzh ar brezhoneg (pell).

## Skolaj Diwan



Diazez : 310 lisead

Len : 10 % eus al liseidi bet skoliataet e skolaj Diwan Plijidi eo tanav-tanav o liamm ouzh ar brezhoneg (pell).

### ◆ Abegoù skoliata


N'eo meneget amañ nemet an abegoù ma'z eus bet merzet diforc'hioù hervez rummadoù an dipologiezh.

	Ar re penn-kil-ha-troad	Ar re desachet	Ar re glouar	Ar re pell diouzh ar brezhoneg
Deskiñ brezhoneg	74 %	64 %	66 %	52 %
Saveteiñ ar brezhoneg	56 %	39 %	31 %	43 %
Sevenadur	44 %	47 %	24 %	19 %
Divyezhegezh abred, spered digor	44 %	45 %	56 %	57 %
Aergelc'h familh	19 %	27 %	33 %	38 %
Ne oaront ket	0	5 %	3 %	10 %

Diazez : 301 lisead

Len : 44 % eus al liseidi penn-kil-ha-troad ha 57 % eus al liseidi pell diouzh ar brezhoneg a soñj dezho eo tuioù mat an divyezhegezh abred hag ar spered digor unan eus an abegoù o deus broudet o zud da skoliata anezho en un hentenn divyezhek.

### ◆ Raktres treuzkas d'o bugale




Diazez : 308 lisead

Len : 74 % eus al liseidi penn-kil-ha-troad zo en soñj da gomz brezhoneg atav d'o bugale m'o defe bugale un deiz bennak.



## Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken



Diazez : 238 lisead

Len : E-touez al liseidi pell diouzh ar brezhoneg hag o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 17 % anezho zo en soñj da gomz brezhoneg atav d'o bugale m'o defe bugale un deiz bennak.

## 4.2. Liamm etre profil brezhonek al liseidi ha neuz yezhel o familh

Al liseidi ► Ar familh ▼	Ar re penn-kil-ha-troad		Ar re desachet		Ar re glouar		Ar re pell diouzh ar brezhoneg	
	N	%	N	%	N	%	N	%
Penn-kil-ha-troad	12	45 %	12	9 %	2	2 %	0	0
Desachet	9	33 %	41	31 %	24	17 %	3	10 %
Klouar	6	22 %	59	45 %	70	56 %	8	45 %
Pell diouzh ar brezhoneg		0	20	15 %	38	25 %	10	45 %

Diazez : 292 familh ha 314 lisead

Len : E-touez al liseidi penn-kil-ha-troad ez eus 45 % o tont eus familhoù penn-kil-ha-troad ha 33 % o tont eus familhoù desachet ha 22 % o tont eus familhoù klouar.

Al liseidi ► Ar familh ▼	Ar re penn-kil-ha-troad		Ar re desachet		Ar re glouar		Ar re pell diouzh ar brezhoneg	
	N	%	N	%	N	%	N	%
Penn-kil-ha-troad	12	46 %	12	46 %	2	8 %	0	0
Desachet	9	12 %	41	53 %	24	31 %	3	4 %
Klouar	6	4 %	59	41 %	70	49 %	8	6 %
Pell diouzh ar brezhoneg		0	20	29 %	38	56 %	10	15 %

Diazez : 292 familh ha 314 lisead

Len : Ar familhoù pell diouzh ar brezhoneg eo 29 % eus o bugale desachet gant ar brezhoneg, 56 % klouar ha 15 % pell diouzh ar brezhoneg.

# GOULENNAOUEG TREUZKAS BREZHONEG E FAMILHOU LISEIDI DIWAN

Enklask kaset gant : klasad Eilvet Du, skoazellet gant Gildas Grimault, kelenner, ha Katell Chantreau, doktoradez (skol-veur Roazhon 2).  
Mersi bras deoc'h evit ho respontoù ! E miz Genver 'vo embannet an disoc'hoù kentañ kredapl.

## TITOUROÙ DIWAR-BENN AL LISEAD.EZ ENKLASKET

Anv : \_\_\_\_\_ Anv bihan : \_\_\_\_\_  
Reizh :  Paotr  Plac'h Bloaz ganedigezh : \_\_\_\_\_  
Klas (live + liv) : \_\_\_\_\_

Hag ur c'hoar pe ur breur dit zo skoliataet el lise Diwan er bloaz-mañ ?  N'eus ket  Ya. Hec'h/e anv : \_\_\_\_\_

E peseurt skolioù out bet (an darn vuiañ eus an amzer) ?

Skolaj  Diwan : \_\_\_\_\_  klasoù divyezhek publik  klasoù divyezhek prevez  all  
Kentañ derez  Diwan  klasoù divyezhek publik  klasoù divyezhek prevez  all

Kumun ma 'teus tremenet an darn vrasañ eus da vugaleaj : \_\_\_\_\_ Departamant : \_\_\_\_\_

Ma vefe ezhomm, hag asantiñ a rafes ez afemp e darempred ganit evit atersiñ ac'hanout ?  Ya  Ne rafes ket

Ha plijout a rafe dit resev disoc'hoù an enklask-se ?  Ya  Ne rafe ket

Mail : \_\_\_\_\_ Pellgomz : \_\_\_\_\_

## TREUZKAS BREZHONEG ER FAMILH

### DA VAMM

Bloaz ganedigezh : \_\_\_\_\_ He micher : \_\_\_\_\_  
Diplom uhelañ bet tapet ganti :  Brevet  CAP/BEP  Bak  Bak +2/+3  Bak +4 ha muioc'h  N'ouzon ket  
Kumun m'he deus tremenet an darn vrasañ eus he bugaleaj : \_\_\_\_\_ Departamant : \_\_\_\_\_  
Kumun m'emañ o chom hiziv : \_\_\_\_\_ Departamant : \_\_\_\_\_

Ha goût a ra brezhoneg da vamm ?

Ya, mat  Ya, mat a-walc'h  Ya, un tammig  Ne ra ket

He santimant ouzh ar brezhoneg

Tomm-tre eo ouzh ar bzg  Tomm-walc'h  Etre an daou  Ne ra forzh  A-enep ar bzg  N'ouzon ket

### Ma oar brezhoneg da vamm mat pe mat a-walc'h :

Pegoulz he deus desket ?

A-raok kaout he bugel kentañ  Goude bezañ bet he bugel kentañ  Kroget a-raok bezañ mamm, ha peurdesket goude

Penaos he deus desket dreist-holl (meur a respont posupl) ?

N'ouzon ket  Gant he zad  Gant he mamm  Gant tud all en he familh  Er skol  
 Er skol-veur  Stajoù  Kentelioù noz  Stummadur 6 pe 9 miz  Hec'h-unan  
 En he labour  Gant ma zad  Doareoù all : \_\_\_\_\_

Pa oas 5 bloaz, ha komz a rae da vamm brezhoneg ouzhit ?

Atav pe dost  Kement e brezhoneg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne rae ket  N'ouzon ket

Hiziv, ha komz a ra da vamm brezhoneg ouzhit ?

Atav pe dost  Kement e brezhoneg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne ra ket

Ha te ? Komz a rez brezhoneg outi ?

Atav pe dost  Kement e brezhoneg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne ran ket

### DA DAD

Bloaz ganedigezh : \_\_\_\_\_ E vicher : \_\_\_\_\_  
Diplom uhelañ bet tapet gantañ :  Brevet  CAP/BEP  Bak  Bak +2/+3  Bak +4 ha muioc'h  N'ouzon ket  
Kumun m'en deus tremenet an darn vrasañ eus e vugaleaj : \_\_\_\_\_ Departamant : \_\_\_\_\_  
Kumun m'emañ o chom hiziv : \_\_\_\_\_ Departamant : \_\_\_\_\_

Ha goût a ra brezhoneg da dad ?

Ya, mat  Ya, mat a-walc'h  Ya, un tammig  Ne ra ket

E santimant ouzh ar brezhoneg

Tomm-tre eo ouzh ar bzg  Tomm-walc'h  Etre an daou  Ne ra forzh  A-enep ar bzg  N'ouzon ket

## Ma oar brezhoneg da dad mat pe mat a-walc'h :

Pegoulz en deus desket ?

- A-raok kaout e vugel kentañ  Goude bezañ bet e vugel kentañ  Kroget a-raok bezañ tad, ha peurdesket goude

Penaos en deus desket dreist-holl (meur a respont posupl) ?

- N'ouzon ket  Gant e dad  Gant e vamm  Gant tud all en e familh  Er skol  
 Er skol-veur  Stajoù  Kentelioù noz  Stummadur 6 pe 9 miz  E-unan  
 En e labour  Gant ma mamm  Doareoù all : \_\_\_\_\_

Pa oas 5 bloaz, ha komz a rae da dad brezhoneg ouzhit ?

- Atav pe dost  Kement e brezhoneg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne rae ket  N'ouzon ket

Hiziv, ha komz a ra da dad brezhoneg ouzhit ?

- Atav pe dost  Kement e brezhoneg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne ra ket

Ha te ? Komz a rez brezhoneg outañ ?

- Atav pe dost  Kement e brezhoneg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne ran ket

## DA DUD

Ur yezh all (pe yezhoù all) 'vez komzet en da familh ouzhpenn ar galleg ha/pe ar brezhoneg (tad pe mamm, leztad pe lezvamm) ?

- Ya  Ne vez ket  Peseurt yezh(où) ? \_\_\_\_\_  Gant piv 'vez komzet ? \_\_\_\_\_

D'az soñj, peseurt abegoù pennañ o deus broudet da dud da gas ac'hanout d'ur skol vrezhonek ? (3 abeg d'ar muiañ)

- Skol gevredigezhel, perzh ar gerent er skol  Pedagogiezh plijus, kelennerien sichant  
 Evit saveteiñ ar brezhoneg  Skol vihan, aergelc'h familh  
 Skol dostañ an ti  Evit ar sevenadur  
 Evit ma vefe desket brezhoneg ganin  N'ouzon ket  
 Evit an divyezhegezh abred, ar spered digor  Respont all : \_\_\_\_\_

Ha tro 'peus bet da gomz eus se gant da dud ?

- Meur a wech  Ur wech  'Meus ket bet

Hag unan (tad pe mamm) a oa mennetoc'h eget egile gant ar raktres skoliata brezhonek ?

- Tad mennetoc'h  Mamm mennetoc'h  An daou ken mennet all  N'ouzon ket

## AL LISEAD.EZ HAG AR BREZHONEG

Petra eo da santimant war da live brezhoneg hiziv ?

- Geriaoueg  Bresk  Etre  Mat a-walc'h  Mat  
Geriaoueg ar santimantoù  Bresk  Etre  Mat a-walc'h  Mat  
Yezhadur  Bresk  Etre  Mat a-walc'h  Mat  
Distagadur / taol-mouezh  Bresk  Etre  Mat a-walc'h  Mat  
Rimadelloù, kanaouennoù, troioù-lavar  Bresk  Etre  Mat a-walc'h  Mat

Da santimant ouzh ar brezhoneg

- Tomm-tre on ouzh ar bzg  Tomm-walc'h  Etre an daou  Ne ran forzh  Skuizh on gant ar bzg  A-enep

Implij ar brezhoneg

Ha mignoned 'teus (barzh pe maez eus al lise), ha brezhoneg ar yezh voas etrezoc'h maez eus al lise ?

- Ne 'm eus ket  1 mignon  2 pe 3 mignon  4 pe 5  6 ha muioù

Gant da vreudeur ha da c'hoarezed e komzez brezhoneg :

- Atav pe dost  Kement e bzg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne ran ket  Ne oaront ket bzg  Na breur na c'hoar ebet

Gant da dud-kozh brezhonek e komzez/komzes brezhoneg :

- Atav pe dost  Kement e bzg hag en ur yezh all  A-wechoù  Ne ran/raen ket  Hini ebet ne oar brezhoneg

Sevenadur (maez eus al labour skol)

Lenn 'rez levrioù pe gazetenoù brezhonek ?

- Alies  A-wechoù  Ne ran ket

Kanañ 'rez e brezhoneg ?

- Alies  A-wechoù  Ne ran ket

Daremprediñ 'rez mediaoù brezhonek (TV, radio, Internet, rouedadoù sokial) ?

- Alies  A-wechoù  Ne ran ket

Stourm evit ar brezhoneg

Ha kemer a rez perzh, mod pe vod, er stourm evit ar brezhoneg (buhez kevredigezhel, stourm politikel, krouiñ, manifestiñ...)?

- Ya, kalz  Ya, kalzik  Ya, un tammig  Ne ran ket

Petra 'rez pe petra 'teus graet da skouer ? : \_\_\_\_\_

Treuzkas brezhoneg d'az pugale : Ma 'tefe bugale un deiz bennak, en em welout a rafes komz brezhoneg outo...

- Atav pe dost  E brezhoneg kement hag en ur yezh all  A-wechoù  Nebeut-tre pe james  
 Se zepanto eus ma fried  N'ouzon ket  Respont all : \_\_\_\_\_